

(f. 197)

eun denick bian a meus bet .

Eun denik bien a meus bet  
A ra din soubla eb karet  
A mond dar feunteun eb sec'het

A ra din neza hir a moan  
Monet dam goële eb tam dam c'hoan .

Nag a ra dime was  
Pillad lan gant va zreit noas .

Pa deu dar ger gant he gorwat  
E kemer eur vas dam pillat

Deffot na ran dezan krampoes  
A va filik en Karhaës .

Va spanel en landivijo  
A va rosel en Gwimillau .

Va zrebis en Landreger  
gant tri marechal e hober .

Va gwinis en milin Penhoat  
Non ket an ent da vond d'e c'herc'hat .

(f. 198)

Va heuneut en Koad ar sec'h  
Va aman nourzon en pelec'h .

E vond dar foar da Lesreven  
e c'hasserjis var eun dunien

Var eun dunien e hassezis  
ia , raz va c'halonik e voëdis

134

ia gant keus dam iaouankis

Raz va c'halon e meus goëlet  
gant keus dam amzer tremenet  
evid goëla ne zistro ket.

eun habid neve a meus bed  
evid he gwiska ne uz ket

Eun habid neve neve flamm  
Evid he gwiska ne uz tam.

~~A zo greet gant an daoulou (1)~~

A zo gred a huanadou  
A zo gried gant an daoulou  
A bordet a huanadou.

7

Jannet Puill, 14 Janv. - 51

---

(1). - Le vers est barré dans le ms.